

492 A

CHANSON

POTRET PLOUILLAU.

Var ton : *Adieu, Pontrö.*

M'AM bije speret da gompren, evel ameus
 fantazi,
 Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi
 Eur c'himiyad leun eus a c'hlac'har, grêt da
 gonscriet yaouanq
 O deustennetar billet due barser blavez present.

Ebars er bla mil eiz cant c'hoec'h, ar bemp
 a vis guengolo,
 E zeo digueet adare eus a baros Plouillau

Tud yaouanq evit an arme, tud eus ar re der-
rupla,

Glac'haret ê o oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif, ne neus qen nemet
pêvar :

Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar
Meledar,

Ha Yannic Prateus ar Goajou, ha Pipi an Aveant,
Pêvar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud
vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :

Emàn a zo un devez trist hac a ra din calonad!

Guelet va mam baour o ouela ha va zad qez
desolet!

Vac'halonic ebars em c'hreiz zo dija cazi rannet.

Calz a sonje dê, marteze, penos e ven eur
poltron,

Em be aon rac un ten fusuil pe rac ur vouled
canon,

P'otramant aon rac ar fatiq, o vale dre an
hentchou,

Pe gousqet var ur guele can ebars er c'hor-
degarchou.

Douguen va dillat var va chouq, va fusuil ha
va zabren,

Bale bemde a gær da gær dre ar fanq hac ar
vouillen;

Ha goude, e fin va beach, ranqout marteze
campi,

Pe gousqet var an douar yen , pe otramant
bivoaqi.

Tor o deus an nep a sonch se ; ma c'halent
lenn em c'halon ,
Evit guelet va bolonte ha va inclination ;
Ma na fofte nemet va goad , me en scuillfe tout
joaüs
Evit souten hon impalaër , un tad qen ca-
rantezus !

Piou na gombatfe qet hardi gant un impa-
laër christen !
Eur gos qen just hac e hini a zo facil da zouten ;
Pa zomp memprou da Jesus-Christ , soudardet
an aviel ,
Bugale da Zoue an Tad , templou d'ar Speret-
Santel.

Arça eta , camaradet , qent quittat eus hor
c'hontre ,
Deomp-ni da Ilis Plouillau da suplia hon Doue
D'hor prezervi demeus goal chanç pa vezimp
en armeou ,
Ha da gonsoli bars er gær hon tadou hac hor
mamou.

Adieu dêc'h , Autrou Sant Millau , patron
eus ar baros-mâ ;
Adieu , qerent ha mignonet , cessit brêma da
ouela :

Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign
 ac'hanomp,
 Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout elec'h
 ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad
 dezolet;

Piou agonsolo da dud paour goude ma vi partiet?
 Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret:
 Ma vije va mab qèz er gær, en dije va soulajet.

Clêvit ar vam o qimyadi ive digant e buguel:
 Deus amàn c'hoas ma c'hambrassin ur vech
 gent eguet mervel;

Aben ma retorni d'ar gær, me vo êt eus ar
 bed-mâ:

Deus amàn etre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet
 d'ar billet,

Bemnos vel ma fot din cousqet, me a seblant
 da velet

O tont eus eur gombat sanglant, var ur chariot
 blesset,

Pe tolet en un hospital gant an oll abandonet.

Ar soudard yaouanq contristet c'hoas gent
 eguet partia,

Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur ouela:

Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en
 esperanç:

Doue, tad a visericord, a zo bras e brovidanç.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar
victoar ,

Gant graç Doue hac ar Verc'hes , e vezo fin
d'ho clac'har ;

Evit merq eus hor vaillantis , gant lore eus
hon toqou ,

Ni a retorno prest d'argær evit sec'hi ho taelou.


Adieu dabaros Plouillau ha d'e oll habitantet ;

Adieu d'hon oll anaoudeguez ha qerent ha
mignonet :

Ha ma na memp qet ar bonheur er bed-mâ
d'en em velet ,

Graç deomp ebars er barados assambles d'en
em gavet.

FIN.



CHANSON NEVEZ

*Var sujet ar Gonscriet partiet a Lannion er
blavez 13, en 8 a vis c'huevrer.*

BRETONET a Vreis-Izel , tostait da glêvet
Eur c'himyd leun a c'hlac'har a nevez com-
poset ,

Zo bet e qær Lannion en eiz a vis c'huëvrer ,
Gant an dud o partia dre urz an Impalaer.

Qement a voa var ar plaç oll int bet deploret,
 O clêvet ar c'himyadou pere o devezs grêt
 Diouz o zud o separi pere a voa gante,
 Int beuzet en o daelou o quittä aneze.

An tad alard'arbuguel: dalc'h memor a Zoue,
 Pehini a cunduo hac en nos hac en de,
 Hac er Verc'hes glorius, hor mam hac hon itron,
 Hac e teuint da tivoal en peb occasion.

Ia, va zad, emezàn, m'em bc sonch aneze,
 Non evit comz na bale hep sicour digante;
 Qemer a rin va Zalver evit va c'hundui,
 Hac ar Verc'hes glorius da zont d'am preservi.

Pa sco an tabourinou dê d'en em assambli,
 E lar an tad d'ar buguel: poent e demp qimyadi;
 En eur vriata reont qent vit dispartia,
 Qen a deu en o c'hreizou o c'halon da ranna.

Qement a voa var ar plaç pa voant o partia
 Demeus a gær Lannion a deu oll da ouela,
 Eus o c'hlêvet en ur vouez o tont da lavaret
 D'o zadou ha d'o mamou: qen a vo er joaüstet.

Cri a vije ar galon ha cri ma na vouelje,
 En auditor Lannion hac an neb a vije
 Eus o gueleit arenjet ha prest da bartia
 Seiz cant eus a gonscriet, tud eus ar re gaera.

Mac'h'hallo an oll gouzout ar suit eus an amzer,
 Ebars er blaves trizec an eiz a vis c'huevrer
 O deus renqet partia goude o billejou,
 Etrezec a Sant-Briec : Doue d'o c'hunduo.

Goude ma voant partiet ha commancet o
 hent,

Grêt gante ho c'himyadou demeus o oll guerent,
 E teuont d'en em gonsoli a drugare Doue,
 Ha da guemer joäüstet bete corf an arme.

Tadou, mamou desolet, deut d'en em gonsoli,
 Dont a rai ho pugale souden d'ho soulagi,
 Pedomp Doue evite, pa renqont partia,
 Hac o guelimp o retorn pa sonjimp nebeuta.

Oh! goassa calonadou eo d'ur vam ha d'un
 tad,

Goude sevel ur buguel, renqout dont d'e
 guittat !

Mes ret eo oboissa d'an impalaer christen,
 Ha monet en e servich en instant ma c'houlen.

Contit hoc'h affliction, bezet evel oute,
 Qemerit ho plijadur ar rest eus ho pue :
 Ar brezel a finisso aben nebeut amzer,
 Hac ar re vo en bue a retorno d'ar guær.

Graç deo da accomplissa evel ma zeo dleet,

Hac ar boneur da c'honit var o enemiet ,
Pere ne fell qet dezo rei ur fin d'ar gombat ,
Nemet guelet an douar o rusia gant ar goad.

Pedomp Doue assambles hac en nos hac en de
Evit hor breudeur christen pere so en arme ,
Ma c'halint o c'hombati ha gonit ar victoar
Var an oll enemiet er mor hac en douar.

Goulennomp digant Doue finissa ar brezel ,
Zo qiriec d'ar glac'har ebars e Breiz-Izel ;
Graç deomp oll d'en em velet goude fin hor bue ,
Da jouissa assambles en joaüstet an ên.

Pater noster.

F I N.



E Mentroulez , eus a Imprimeri LÉDAN,